

Gerioù ar vuhez

RKB

▶▶ | Radio Kreiz Breizh

LOD

Lod

« Lod ar pardon », ar pezh a vez profet d'ar re a zo chomet b'ar gêr

« Lod an eured », ar pezh a vez degaset d'ar gêr goude an eured

« Lod ar c'hi », doggy bag

« Lod sukret », bonbonioù

« Lod sec'h », gwispid

« Lod sall », gwispid evit an digor-kalon

« Kemer (e) lod », kemer perzh


« Kemer lod deus o foanioù »

Lodennañ, ober lodennoù, dispartiañ

Adlodennañ, lodennañ en-dro ar parkeier

Lodennour, un den hag en deus prenet lodennoù e-barzh un embregerezh

« Lod deus an dud », darn deus an dud



Lodenn

Lodennoù

« Al lodenn-varr », ar pezh a rank marrat pep hini

« Lodenn ar paour », ar pezh a vez miret da reiñ d'ar re baour

« Ma lod »


E-barzh ar ganaouenn
Ma c'homer :

« N'eus ket kalz a zisparti
'tre lod ar c'hi ha ma hini »

« Pa fritan un dousenn uoù
eñ 'nive dek, me 'nive daou,
n'eo ket ingal al lodennoù »

Da vont pelloc'h

Kit da selaou
ar ganaouenn
Ma c'homer gant
an Itron Raoul
war lec'hienn
Dastumedia



COFINANÇÉ PAR
UNION EUROPÉENNE
UNANIEZH EUROPA



L'Europe s'engage
en Bretagne / Avec le Fonds européens
de développement régional